

KANAOUEN NEVEZ

81

ENN HENOR

D'AR WERCH'EZ VARI.

(Kenniget da Berson Sant-Lorans.)

WAR EUNN TON NEVEZ.

Diskan,

Peger kaer ez eo Mamm Jézuz !
Pegen dous ha trugarezuz ! (*bis*)
Peger mad ha madelezuz !

Lavar d'i-me , den ann Arvor ,
Ha ker kaer eo da vag war vor ,
Gand he gweliou gwenn-kann digor ?
Peger kaer ez eo...

Lavar d'i-me , den ann Argoad ,
Ha ker kaer deliou glaz ar c'hoad ,
Pa zeu eur bann-heol d'ho sklerat !
Peger kaer...

Lavar d'i-me , den ann Arre ,
Lein ar memez ha ker kaer e ,
Gwenn-kann gand ann erc'h d'ar beure ?
Peger kaer...

Lavar d'i-me , potr ann denved ,
Hag hen zo stereden e-bed
Ker kaer enn noz steredennet ?

Peger kaer...

Leret d'i-me , tud ar mezou ,
Ha ker kaer eo ar glazennou ,
O lintri gand ar glizennou ?

Peger kaer...

Leret d'i-me , bugaligou ,
Er prajou o kutuil bleuniou
Ha bleun ker kaer zo er prajou ?

Peger kaer...

Nag enn Arvor , nag enn Argoad ,
Er menez , eun oabl , nag er prad ,
Netra ker kaer , netra ker mad !

Peger kaer ez eo Mamm Jezuz !

Pegen drant ha trugarezuz ! (*bis*)

Peger mad ha madelezuz !

